



BARN AR VEZVENTI

21

WAR DON : *Ar Basion vihan pe Telen ar barz.*

An tòn-eila a zo bet savet gant an Aotrou BOURGAUT-DUCOUDRAY.

All.^o Mod^o

Telen ar Barz, E-un tie de mery Keru...

goc Pi di un tek Hag e ge lok

Dim. p

Er penn kenta
Euz ar bed-ma
Doue 'grouaz
Hon tad Adam ;
Eun ene splam
Ennan 'lakaz.

Gwall-stlabezet
Dre ar pec'hed,
En e gaerder
Rentet e oe
An ene-ze
Gant hon Zalver.

Tud 'zo re stank
Hirio er fank
'Stlej o ine,
Ouz e zôtra
Ha diverka
E vravente.

En hon touez-ni
Ar Vezventi
Eo ar gwaller
A goll en den
Ar wir-skeuden
Euz e Grouer.

Ha, deiz hon Barn,
Hon diskouarn
A voubouo
Gant mouez skrijus,
Yen a klemmus,
Mouez an Aotro :

— « 'Vidout, Breizad,
Ar gwella gwad
Euz ma c'halon
Am euz skuilhet,
Er groaz staget
'Tre al laeron. »

« Sec'hed heuzus,
Anken spontus
'Meuz gouzanvet ;
Ha gwinn c'houero,
Gant c'hoarz garo,
D'in 'ginniget. »

« Ha, koulskoude,
Grasou an Nè
'Peuz bet a-leiz ;
Rak ho sent koz
'Denn ma bennoz
War douar Breiz »

« Broad ebet
Ken binniget
Ha Breiz-Izel,
Gwir Vro ar Zent
En amzer gent,
Douar santel ! »

« He brezonek
'Vel ar mel c'houek,
En gwir, a dal
Eur voger vein
Rag an dud vrein
Euz a Vro-C'hall. »

« Kaerat gwersiou,
Furat gizioù,
'Dleje miret
O feiz didam,
O ene splam
D'ar Vretoned ! »

« Hag, evelkent,
Mam-Vro ar Zent
'Zo 'n em gollet
Oe'h eva re ;
An evach krè
'Neuz he beuzet. »

« Ha bern war vern,
'Barz an ifern,
E koueet holl,
Ma bugale !
Breiz, eun drue,
A ya da goll ! » —

O ma breur ker,
Ma breur mezhvier,
Tro kein, m'as ped,
D'as tech mezuz !
En hanv Jezuz,
Lez da bec'hed !

ABHERVE